

YF_0065_An intanvez he daou bried

Pa deuas an ordrenans dre berzh ar Republik,
Ma renkas ar mab nevez partial da vond kuit.

O salokras, merc'h nevez, tevet na ouelez ket,
'Benn seizh bloaz ha tri devezh d'ar ger me 'vo rentet

salokras = salv ho kras = sauf votre grâce

Tremenet an tri devezh, tremenet ar seizh bloaz,
Ar paourkaezh denig arme d'ar ger na deu ket c'hoazh.

'Benn ur pennadig goude, er ger ma voe rentet,
Bord dor ti e vamm-gaer lojeiz 'n deus goulennet.

O salokras, den armet, aman ne lojfet ket.
Aman zo fest hag eured diouzh taol da gaouet.

Dibosubl eo, ma mamm-gaer, c'hwi na ma lojfec'h ket,
Ma holl aour, ma holl argant, d'ho merc'h-hu am eus roet

Ouzhpenn seizenn ma eured ha ma gwalenn argant
D'ho merc'h-hu am eus roet diouzh taol ar Sakramant.

O salokras, den arme, antreit ha deuit en ti,
Ma merc'h 'zo er gabined, deuit da barlant ganti

Ar verc'h nevez pa glevas, hi a gomansas gouelan .
Aotrou Doue, emezi, petra a rin me breman ?

Aotrou Doue, emezi, petra am eus me graet
Me a sonje e voen intanvez, padal am-eus daou bried.

O salokras, merc'h nevez, tevet na ouelez ket
Me a zo vont d'ober ma 'faket da bartial da vont kuit.

O salokras, den arme, te na bartifet ket
Te eo ma 'fried kentan, te eo an hini a chomo.

An hini a zo deuet aman gand mortuajou faos
En a renk ober e baket da bartial a-raok an noz.